

- 211 -

Dastumad Pennwern : dormskrid 89

83. AR GODISSEREZ

(follennoù 249 - 250)

Teir noz zo ne meus ket kousket bane
Na fenoz ne rin ket adare.

Nag e klevet an aër wiber
E c'hwibanat var ar rinvier.

Hag hi e lavaret dre he c'hwiban
nen deus demizi nemet eunan.

◦◦◦

- Deud-on, va mam, do konvia
Da zond diziou dam assista.

Me a zo seiz gwech demezet
Eb beza biskoas eureujet
Eman ar c'helou dec'h da klevet.

◦◦◦

An de demeus an euret
Ebars an illis pa entree
He c'hein d'an oter a° troe. ° = e troe

An Otrou person a lavare
D'ar kompagninez an de se :

- Tollom eves, kompagninez,
Rag an erouant zo en om touez.

Pa voant deus an dol e nem assamblet
Ar plac'h a euret digato zo sortiet
Abaoë neket bed goëlet.

◦◦◦

An diaoulou a c'houlene
Na deus sonnerien an euret an deis se :

- Sonnerien an euret, dem leveret
A brao avoalc'h e bed ar banket ?

- 212 -

- Brao avoalc'h e bet ar banket
Med ar plac'h a euret zo dianket.

- Mar c'heus dessin d'he goëlet
Ni o lakeio de vellet

- Ne reomp forç evid e goelet
Ia, gant n'or bezo droug ebed.

- Sonnerien va euret din leveret
a c'hui a raë eur plijadur em reket ?

Dallit va goalen a va chapelet.
Kassiti dar ger d'am briet.

Leverit dezan ne pedo ket Doue evidon
Rag en ivern daonnet on.

Neb a zemez gant e c'hras mad
Hag a ia da freza gant goal pennad
Deus an diaoulou a ra kontrat.

—————
VVVVVVVV

Jannet Puill, 9 févr. 1851